

- 15 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

91. DIDOSTAIT NOBL A PATABL ...

( follenn 5 )

Didostaît nobl a patabl, didostaît da klevet,  
Da sellaou kana eur ganaouen var tri matier kompozet.

Ar genta eo ar garantez, an eil eo an disparti  
Me lavaro deoc'h d'an tride pegen bras eo o fazi.

- Debonjour va inklinat, soulajamant va speret,  
Nen deus meduçin var an douar a kement na graffe pare

Ganeoc'h, va mestrez, eman an ongant ag ar pez zo rekis  
evid soulaji va c'halonik ag e lakat var he c'his.

- Ganeoc'h, va chervijer, ezon souezet e ven kiriek  
deus a ze  
O talchen pel da langissa ma alfen o hober pare.

Dellet, setu aman an alc'houe, ar pez zo em domination  
Kemerit ar pez zo rekis evid soulaji o kalon.

An den man en devoa eur vec'h iaouank  
Ag en roet d'eur c'hoz intaon  
Attaset gant ar madou.

Ma viche bet lezet ar plac'h-man, lezet en he obtion  
Pa nan devoa laket e santimant en eun den iaouank a  
fesson,

e diche bed e santimant, et dije gret tieges mad  
Goël e karantez en tre daou zen evid madou en tre pad.

en tre zoc'h, tadou a mamou, a zemez o bugale  
Dar re a plich dech o (kemeret)<sup>o</sup> nonpas dar re a plich  
de

Mes c'houi a komet eur pehet deus ar brassa zo er bed  
lakat daou zen assemblez ma ne ellont e neum garet.

~~~~~

Jannet Puill, 9 Févr. 1851

~~~~~

<sup>o</sup> (kemeret) : diaes da lenn, marteze o heunant:hoc'h  
unan